

RAZARH

Ema ar razarh o tostaad.

War an orjalennou,
evel notennou muzik
war bajenn loued an oabl,
ar gwennilied,
en o huzuliadegou,
a brient o himiad.

Erru eo ar razarh.

Ranngalonet,
an halegenn-stoueg
a zoub he fennad-bleo
en oglenn,
doare ganti kaoud c'hoant
en em veuzi.

Er vleñchenn
eun delienn a derm,
a skrij,
ha, goude,
o soubla d'he zonkad,
a ziskrog diouz ar brank,
hag, o hournijal,
a adkav he c'hoarezed
war al leton.

Y. Brusk

miz du 1985

HIZIO, ADARRE

Hizio, adarre, en em lakaan da rei ma haella peoh.
Hag ho pedan da fest treh an drougverz,
briad ar pezh zo kollet, huñvre an dibosubl
ha lakaad d'an deñvalded eur sked muzellou.

Ma he homprener mad, ar varzoniez zo ed,
eul luh paket, eur pok roet,
eur zehed karuz, eur c'hoant doareou-beza,
eun tan ragsantet, eur wrez en ho kalon.

Ha daoust ma 'z eo youh en eur bed rust
(ma kav eur werzenn diousskouarn zo endeo kazi eur burzud)
hag eo digenvez gand dent ha follentez klasket
hag eo terzienn asantet hag eo mantridigez berniet,
n'em-eus ket mui louzaouenn ebed, a-eneb al linad hag ar gwer,
war ar heotenn deñval e lakaan ma gwerzennou gwenn.

Vicente CANO
(deuz MANXA niv. 49)

Troet diwar ar spagnoleg gand **Youenn BRUSK**

GWERZONIEZ

Petra 'vefe ahanon ma n'em-mefe ket
eur werzenn evid huñvreal beb mintin ?
Eun den zo eun drougverz ma ne hounid ket
e nevez-amzer gand heoliou an touelladur.

Petra 'vefe ahanon ma ne drehfen ket
kement e pismigan glaharet ha dilañs
o tigura bemdez ma frenest
da avel ar zehed gwirion ?

Ya, ar zehed astennet... hag an eñvor...
hag ar galon... er pezh emañ o klask
hag e toud ar pezh a zoñjan hag ar pezh a skrivan.

e-giz diazez d'am hoñchennig
evid rei deoh da houd e kendalhan kared
ha va hendrehi e kendalhan beza beo.

Vicente CANO

(deuz MANXA niv. 46)

Troet diwar ar spagnoleg gand

Youenn BRUSK

Vicente CANO

Ganet en Argamasilla de Alba (rannuro Ciudad Real), Mañich, Spagn, er bloavezh 1927, el leh m'eo chomet betek 1973. Bremañ emañ o chom e kêr Ciudad Real el leh m'eo skridvarnour e meur a embannadenn ha rener ar Strollad Lennegel "Guadiana" hag ar gelaouenn varzoniel MANXA. Braz-tre eo niver ar prizioù (14 pe 15) e-neus gounezet e meur a genstrivadeg war ar varzoniez.

Daou leor a varzoniez e-neus embannet el leh e kaver an titloù : "Inquietud" (Neh), 1969 ; "Cuando nunca sea tarde" (Pa ne vo ket morse diwezad), 1979 ; "Gentes de luz y de asombro" (Tud sevenet hag estlammuz), 1984 hag "Amor es una lluvia" (Karantez zo eur glao), priz Enrique Rius Zunon, Ciudad Real, 1986. Ouspenn e chom diembann an titloù : "Los rostros de la sed" (Dremmou ar zehed); "La Mancha es mi canción" (Ar Mañich zo ma hanaouenn) ha "Balada de Navidad" (Gwerz a Hinivelez).

Youenn BRUSK